

1982

1.

Bemdez e plije dezhañ erruout abred, amzer dezhañ mont d'an ostaleri *Frankiz*, nepell eus ar c'homiserdi, 'penn all ar c'hroashent-tro. Fent ar perc'henn a blije dezhañ. Evañ a rae ur bannac'h kafe en ur selaou ar c'heleier degaset gant an dud. A bep seurt tud a veze desachet en davarn-se, pa oa an hini gentañ digor e kêr, ha daoust d'al lec'h ma oa staliet. Eno e veze gwelet micherourien oc'h echuiñ pe o vont da gregiñ gant o labour, koñversanted o klask startijenn evit an devezh e-barzh o zasad kafe pe er c'homzadennoù, treid-bank ostaleri gant o gwerennad gwin gwenn o klemmichal war gresk an tailhoù pe war an nebeud a gomprenazon gant ar yaouankiz a-hiziv. Gwelet e veze ivez ar re sot gant ar c'hoarioù hag a zeue aze kerkent ma c'hallent, evel en ur c'hazino marc'had-mat evit ar renkad vicherourel, o skrapañ pe gochañ kombodoù freneziusoc'h-freneziusañ dre ma 'z ae an eurvezhioù hebiou.

Bemdez, neuze, ez ae Louan Simon, Enseller brigadenn polis Gwengamp, da dañva aergelc'h an deiz er *Frankiz*.

— Pebezh reuz, me 'lâr deoc'h ! N'eo ket sonerezh a reont ! Trouz ne lâran ket ! Ur vandennad anarkourien ! Euzhviled, ya ! 'Peus ket gwelet anezhe ? Gwisket n'eus forzh penaos ! Nag o blev 'ta ! Lak' unan all din 'ta. Lonkerien daonet da 17 vloaz ! Ha drammet, sur-mat, evit gallout gouzañv seurt trouz ! An hanter 'vefe pichoù melen ne vefen ket souezhet !

An derc'hent e oa bet aozet ur sonadeg punk en MJC. Tud ar c'harter o doa klasket lakaat an ti-kêr da nullañ an abadenn. Klevet en doa Louan komz eus al luskad "punk"-se. Titour en doa klasket. Gwir eo e rede ar vrud e vije ar bunked tost eus luskadoù anarkour evel ar *Brigadennoù Ruz* e Bro-Itali, strolladoù armet anezhe. Met ar strollad pedet aze a oa tud yaouank o tont eus familhoù en o aes, war-bouez unan. War a seblant e oa krog ar strollad-se, "A-lazh-ki-klañv", d'ober un tamm berzh er vro. Met ne oa bet kudenn ebet en abadennoù tremenet. Setu perak en doa divizet ar c'homiser chom hep nullañ an abadenn na lakaat ugent den evit mirout anezhe da vont e kreiz-kêr.

— Ha p'ra 'ra ar polis ? a c'houlenas ar c'hlemmer war-zu Louan. Mann 'bet, 'vel kustum ! Gwashoc'h c'hoazh ! Difenn 'reont 'nezhe a-enep an annezidi ! Nag ur vezh !

Goût a rae a-walc'h an enseller ne servije da vann respont dezhañ. O vousec'hoarzhin outañ e oa pa erruas ar brigader Ollivier en davarn :

— Ma digarezit, Enseller Simon. Emañ ar C'homiser ar Rouz o klask war ho lerc'h. "Mallus" en deus lâret.

— Trugarez, Brigader Ollivier. Lakait ar c'hafe war ma c'hont, mar plij, Patron, emezañ sioulik d'an tavarnour.

— Hag e vo graet ! a respontas hennezh.

Treuziñ a reas ar straed en ur gomz gant ar brigader hag en ur c'houlenn keloù diwar-benn e wreg dougerez hag e verc'h henañ hag a oa bet oberataet ar sizhun a-raok. Devezhioù duañ ha yenañ ar goañv a dostae ha lipenn a zeue er-maez eus o genoù pa gomzent.

Pignat a reas an enseller Simon gant an diri, davet burev ar c'homiser, o saludiñ an holl dud a wele o tiskenn pe o tremen hebiou dezhañ. Ne gompren ket perak e oa ret aozañ ar burevioù evel-se : e vurev a oa en traoñ, e penn ar savadur, e-tal en eil enseller, Yann-Loeiz Barv ; met hini ar c'homiser a oa en eil estaj, ha ret e oa d'an ensellerien treuziñ ar savadur evit sevel gant an diri, pignat daou estaj ha treuziñ en-dro ar savadur evit erruout e burev ar c'homiser. Alies e veze galvet an ensellerien er burev-se. Estreget bezañ sur e rafent un tamm sport, ne gompren ket perak an diaoul e oa bet aozet evel-se. E genlabourer Barv en doa klemmet meur a wech met bep tro e oa bet respontet dezhañ e oa an aesañ evel-se.

Erruout a reas dirak ar burev. Evel kustum e analas div wech a-raok skeiñ ouzh an nor evit en em brientiñ da c'houzañv mouezh skiltr ar gwaz-se. Un den bihan e oa ar c'homiser hag a-viskoazh en doa bet Louan disfiz ouzh an dud vihan rak gallout a reont bezañ evel chas skribiton : ober a reont trouz, aonik ma 'z int, met ur wech kroget e kroc'hen o enebourien, ne ziskrogont ket ken. Hag ar c'homiser a oa eus ar chas gwashañ rak ne oa ket eus ar re aonik.

— Deuit tre ! a huchas ar c'homiser a-drek an nor.

Louan a zigoras an nor hag a welas ar c'homiser bihan azezet drek e vurev, tres ar strilh warnañ. Kavout a rae dezhañ e koeñve ar gwaz-se a zeiz da zeiz. Jodekoc'h-jodekañ e teue da vezañ ken e kave d'an enseller e oa ar

paotr bihan-se o chaokat bepred. E-barzh e wiskamant strizh e selle ar c'homiser ouzh e enseller en ur ginnig dezhañ azezañ, o tiskouez ar gador gant e zorn dehoù.

— Soñj 'peus eus o alioù war ar sonadeg, Simon ?

— Ya, Komiser, a respontas an enseller war an difenn. N'int ket tud d'ober politikerezh, nemet tud yaouank o klask heuliañ ul luskad hag a ra berzh. N'eus bet kudenn ebet en abadennoù tremenet. Abeg ebet da nullañ pe da ziwall ouzhpenn da gustum.

— Abalamour da se ne oa nemet daou vrigader dilhad boutin warne. Ha gwir eo n'o deus ket merzet kalz tra : alkol forzh pegement, un tamm dramm er-maez eus ar sal, chikanoù tud vezv, marteze unan pe zaou a c'hallfe bezañ faskour pe anarkour met pas muioc'h evit-se.

— Ha neuze, Komiser ? Pelec'h 'mañ 'n dalc'h ?

— An dalc'h ? a huchas ar c'homiser en ur sevel, pleget a-us d'e vurev evel p'en dije c'hoant da zislonkañ e fulor war an enseller a ardaouas en ur glevout mouezh ar c'homiser o vont uheloc'h er sonioù skiltr. 'An 'vont da lâret deoc'h pelec'h 'mañ 'n dalc'h, Enseller Simon ! Ur c'horf ! Marv ! En ur boubellenn !

Sioulaat a reas an denig en ur azezañ en-dro ha mous-c'hoarzhin ouzh an enseller, badaouet gant ar c'heloù-se :

— Ha c'hwi zo 'vont da ziskoulmañ an afer-se, Simon. Ha buan. N'em eus ket c'hoant e vefe hor c'homiserdi danvez goapadennoù ar re all pa vin o riboulat gant ar prefed a-benn an Nedeleg. Kit en MJC, Simon. Ur skipailh a zo eno c'hoazh. Diskoulmit an afer-se an abretañ ar gwellañ, Simon.

— Hag e vo graet, Komiser, a respontas an enseller en ur sevel ha mont war-zu an nor.

Un drouklazh ? Sur a-walc'h e oa unan diwar warizi. N'halle bezañ nemet se, amañ, a soñje an enseller o tiskenn gant an diri, hep gwelet na klevet ar boliserien a salude anezhañ. Erru en traoñ, e-kreiz an trepas, e tihunas trumm. Gwelet a rae an holl dud o jestraouiñ tro-dro dezhañ evel ur genstrivadeg d'an hini a vefe ar muiañ a brez warnañ. Chom a reas ul lajadig o sellet ouzh an abadenn-se. Tregont vloaz 'oa e oa Louan Simon unan nevez tutaet ha kemeret en doa perzh d'ar mare-se en un enklask war un drouklazh. Ar wreg he doa sanket pemzek gwech kontell ar gegin e korf he gwaz ; dek gwech en e gof ha pemp gwech etre e zivhar. N'en doa ket ankouaet ar gwad, na daoulagad digor ar gwaz war al leur. Ne oa ket bet diaes d'an enseller kompren dougad an torfed met ar vaouez n'he doa ket soñj tamm ebet eus ar pezh a oa c'hoarvezet. Kavet e oa bet en he gwele, o kousket c'hwek, gwad he gwaz warni, ar gontell war an daol-noz. Emañ c'hoazh, sur a-walc'h, e ti ar re sot. Dizoloet e oa bet gant an enseller en doa ar gwaz div wreg kleiz hag anavezet mat e oa gant gisti ar "c'harter tomm". Ar vaouez n'he doa ket gallet gouzañv pelloc'h trubarderezh he gwaz ha kollet he doa he spered.

Louan Simon, dre forzh bezañ kendalet ouzh gwashañ nammoù Mab-den, ne veze ket souezhet ken gant kalz a dra. Ur c'horf kavet en ur boubellenn ? E-pad e remzad enseller – eizh vloaz – en doa dizoloet teir gwech babiged en ur skornerez. Ne oa ket o vont da vezañ stroñset gant ur c'horf en ur boubellenn. O vevañ e oa e-barzh ur gevredigezh digomprenus, a soñje dezhañ. Bloaz 'oa e oa bet dilennet an tu kleiz d'ar brezidantelezh met ne oa mann cheñchet. Echu e oa mare ma oa labour evit an holl, an disparti a groge da vezañ diouzh ar c'hiz, bugale

Mae 68 a groge da vezañ kerent d'o zro. Muioc'h-mui e wele an enseller Simon maouezed o-unan gant bugale, dilabour, hep gweneg toull ebet. Abaoe kazi dek vloaz – krach an eoul-mein e 1973 – e wele ar gevredigezh o cheñch, ha n'en doa ket ar santimant e oa war un tu mat.

Skeiñ a reas ouzh dor e eiler, ar c'habiten Morvan. Hemañ a zigoras diouzhtu an nor, e borpant war e gein, prest da vont.

— Demat Enseller, emezañ. Petra zo hiziv ?

— Un drouklazh, war a seblant, a respontas Simon, hanter vadaouet gant ar souezhadenn, e zorn o skeiñ c'hoazh el lec'h ma oa an nor pemp segondenn a-raok.

— Un drouk... ? a chuchuas ar c'habiten.

— Ya. Emañ ar mezeg lezennel war al lec'h. Deomp.

Serriñ an nor a reas ar c'habiten hag heuliañ an enseller betek ar c'harr, birvilh ennañ gant ar soñj kemer perzh en un enklask war un drouklazh ha spontet war un dro gant ar pezh e oa o vont da zizoleiñ war al lec'h. Un den yaouank e oa ar c'habiten Morvan, dindan 30 vloaz. Ral e veze gwelet ur paotr ken yaouank el live-se, met diskouezet en doa pegen lemm e oa e spered evit diskoulmañ kudennoù kement hag e zalc'hegezh evit mont betek penn an traoù. Ur bloavezh en doa lakaet da ziskoulmañ un afer a laeroñsi en un drogerezh. Pa oa ar re all oc'h ankouaat an afer ha lâret d'ar perc'henn staliañ ur stignad surentez, eñ, brigader d'ar mare-se, a gave dezhañ ne veze ket laeret n'eus forzh petra, ha pa veze traoù boutin el lod. Tremena a rae alies nozvezhioù war api tost d'ar stal. Meur a wech en doa c'hwitet war al laeron. Met ur wech... Gwelet en doa anezhe. Dindan pemp munutenn, hep trouz, evel pa vijent en o stal dezhe, an daou baotr

a yae kuit, pep a sac'h-kein leun gante. Heuliet en doa anezhe betek ur c'harrdi. Notennet en doa an niverenn hag eñ kuit pa oa c'hoazh an daou baotr e-barzh. An deiz war-lerc'h e teue ur skipailh d'ar c'harrdi hag ur skipailh all e rannidi perc'henn ar c'harrdi. Dizoloet o doa e oa an daou baotr anarkourien fougaserien. Ar pezh a laerent e stalioù disheñvel a servije evit gwalldaolioù e Bro-Spagn, Bro-Itali hag ur wech en tu all da voger Berlin zoken. Lorc'h e oa bet enne o tisplegañ se d'ar barner. Kaset e oant bet d'an toull ha Morvan titlet war-eeun da Gabiten, en ur gêr vihanoc'h. Dipitet e oa bet er penn-kentañ oc'h erruout er gêr-se met cheñchet en doa ali o labourat gant an enseller Simon. Ur gwaz war-dro 50 vloaz e oa Simon. N'en doa ket bet torfedoù bras da ziskoulmañ, met desket en doa d'ar c'habiten un hentennouriezh. Ne oa chomet torfedour ebet digastiz gantañ. Un enklask war un drouklazh a rofe tu dezhañ sur a-walc'h da echuiñ e brantad evel Komiser. Ha Morvan a c'hallfe bezañ anvet enseller en e blas.

2.

Soñjal a rae Morvan en dazont grataus-se pa chomas ar c'harr a-sav, dirak ur bern tud oc'h heuliañ labour ar polis, en tu all d'an amregad surentez staliet gante. Mut e chomas an enseller hag e gabiten en ur dreuziñ ar mor a dud a oa aze. Ur brigader a zegemeraz anezhe :

— Demat, Enseller Simon, Kabiten Morvan. Emañ ar mezeg lezennel ouzh ho kortoz, drek ar savadur. Ur sal a zo bet lakaet prest evit an atersadennoù. Emañ aozerien ar sonadeg en degemer, gant daou zen yaouank kavet o kousket en o c'harr.

— Trugarez deoc'h, Brigader. Lârit dezhe ec'h erruimp dizale, mar plij.

— Mat, Enseller. Mont a ran diouzhtu.

Tostaat a reas an daou waz eus al lec'h ma oa bet kavet ar c'horfen ur saludiñ ar boliserien a dremene. Dic'hoarzh e oa dremm Simon pa saludas ar mezeg lezennel, ur paotr war-dro daou-ugent vloaz, hanter voal, ha na oa ket kollet e imor vat gant ar blegenn.

— Gortoz a raen ac'hanoc'h evit kregiñ, Enseller, eme ar mezeg en ur lakaat e vanegoù da strakal. Goulennet em eus e vefe serret ar golo evit mirout ouzh ar frioù-furch da darvañ ma labour. N'on ket bet war-dro ar c'horf c'hoazh.

Digeriñ a reas ar mezeg ar boubellenn ha tremen e benn a-us. Dizoleiñ a reas korf un den yaouank, blev hir dezhañ, e benn troet war-zu ar foñs. Gwisket e oa gant ur re vragoù voulouz hag ur vantell lêr nevez a-walc'h.

— Ur paotr dindan ugent vloaz a lârfen, a verzas ar

mezeg en ur bediñ an enseller hag ar c'habiten da sellet ivez. Ne weler takenn wad ebet er boubellenn.

— Diblaset eo bet ? a c'houlennas ar c'habiten en ur goach e heug.

— Marteze...

— Lazhet eo bet amañ. Nepell, d'an nebeutañ, a lâras an enseller. Gant dilhad 'seurt-se e oa ar paotr er sonadeg. N'eus ket bet kavet gwad en trowardroioù. Lazhet eo bet er boubellenn marteze.

— Traoma klopenn ebet, a zisklêrias ar mezeg en ur deuta ar c'horf-marv. En em zifenn n'en deus ket graet war a seblant, a ouzhpennas en ur ziskouez daouarn ar paotr d'an enseller. Merkoù a vije gwelet m'en dije graet.

— Unan bennak anavezet gantañ, pe eus an a-dreñv, neuze, a brederias an enseller a vouezh uhel.

— A ! Arbenn ar marv hon eus amañ, sur a-walc'h, Enseller, a zisklêrias ar mezeg gant plijadur en ur ziskouez goûg ar paotr. Melloù ar goûg drailhet. O klask unan bennak kreñv-tre emaoç'h. Kontrol-mik eus ar pezh a soñjer abalamour d'ar filmoù ez eo diaes terriñ melloù gouzoug un den. Ret eo kaout kalz a nerzh. Unan eveldoc'h, da skouer, e vije ret dezhañ klask meur a wech a-raok dont a-benn.

— Ha pa vefe anavezet ar stek rik d'en ober ? a c'houlennas ar c'habiten yaouank, un tamm dipitet pa oueze ne oa ket gwir an dra-se — hunvreet en doa meur a wech ober se da dud zo.

— Ya, sur, a respontas ar mezeg. Mar plij ! a huchas war-zu tud e skipailh a oa o c'hortoz a-dreñv.

Hastañ a rejont da erruout ha da gemer ar c'horf er boubellenn evit e lakaat en e c'hourvez war al leur. An enseller a roas urzh da zaou boliser da furchal er boubel-

lenn en ur reiñ manegoù dezhe. Dipitet, e kemerjont anezhe hag int a-ruz-botez betek lec'h an dizoloadenn. E-pad an amzer-se e oa ar mezeg o kenderc'hel e enklask war gorf ar paotr marv.

— Evel ma soñje din, a lâras ar gwaz, kollet e imor vat o sellet dremm ar paotr yaouank war al leur. Gallout a reer faziañ en ur reiñ un oad war un dremm. Met aze, Enseller... Seitek vloaz d'ar muiañ e oa ar paotr yaouank-mañ.

Kemer a reas ar gwrezverker en e sac'h hag e sankañ er c'horf evit tizhout an avu. Gortoz a reas un nebeud segondennoù hag e tisklêrias d'an enseller :

— Eur ar marv etre 10e ha 2e beure. Resisoc'h e vin goude ar skej-korf. Sellit 'ta, Enseller. E c'hoûg. Dalc'het eo bet dre e c'hoûg gant un dorn. N'eo ket bet mouget met sur a-walc'h ne oa ket evit c'hoarzhin. Klask a rimp adkavout roudoù bizied.

— Gallout a reer ober se ? a souezhas ar c'habiten.

— N'eo ket alies, a respontas ar mezeg, laouen o tisleagañ d'ar paotr yaouank. Met a-wechoù... gwaskañ a ra ken kreñv an torfedour korf – amañ, goûg – an hini marv ken e laosk roudoù bizied a c'haller implijout, ken aes ha war dornell un nor. Hag amañ... enskantet a-walc'h eo ar merkoù evit kaout spi gallout kavout roudoù. Gwelet a rimp en hor imbourc'hva.

Teutañ a reas an dilhad ha lâret c'hoazh d'an enseller :

— Mann ebet er godelloù. Ur c'horf hag e vo ret lakaat un anv warnañ m'ho peus c'hoant da ziskoulmañ an afer.

— Hum, a respontas an enseller o soñjal ne vefe ket, sur a-walc'h, an diaesañ.